



HAL
open science

Frañs : pemp trec'h un adkreizenniñ didrouz ?

Gérard-François Dumont

► To cite this version:

Gérard-François Dumont. Frañs : pemp trec'h un adkreizenniñ didrouz ?. Population et avenir, 2024, 767, pp.3. <halshs-05411608>

HAL Id: halshs-05411608

<https://shs.hal.science/halshs-05411608v1>

Submitted on 11 Dec 2025

HAL is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



HAL Authorization

Frañs : pemp trec'h un adkreizenniñ didrouz ?

Mammenn: *Population & Avenir*, niv 767, Meurzh-Ebrel 2024,

<http://www.cairn-int.info/journal-population-et-avenir.htm> ; www.cairn.info/revue-population-et-avenir.htm ;

<https://www.population-et-avenir.com/revue-population-avenir>

Bez ez eus ar gerioù ha bez ez eus an dra . E 1982, war-lerc'h kantvedoù eus ur sistem politikel kreizennet, emañ Frañs o klask digreizenniñ o reiñ frankizoù ober ha kembelioù d'ar strollegezhioù lec'hel. E 2003 ec'h ouzhpenn ur frazenn nevez en he bonreizh: "Digreizennet eo hec'h aozadur"¹. Petra' dalv e gwirionez ? Enep an destenn vonreizhel, hag-eñ ne weler ket un adkreizenniñ didrouz e Frañs ? Pemp elfenn a ro tro da respont d'ar goulenn-mañ.

Digresk bras savadoù dezho-o-unan ar strollegezhioù lec'hel² hag o emrenerezh e-keñver telloù. Krog oa bet an dra-se e fin ar bloavezhioù 1990 gant lamidigezh savadoù diwar dell ar strollegezhioù lec'hel stag ouzh lodenn ar goprou en taos war ar vicher, lamidigezh lodenn ar rannvroioù eus an taos war al lojeiz, lamidigezh ar vigneten war kirri an dud prevez a oa derannet d'an departamantoù abaoe 1984. Goude un toullad diarbennoù heñvel, e voe graet ur c'hammed ouzhpenn gant lamidigezh an taos war al lojeiz e fin ar bloavezhioù 2010, ha, telloù lec'hel all da-heul³. Evel-just, ur wech "broadelet" ar savadoù diwar dell-se e tlee ar strollegezhioù lec'hel, ez teorikel, bezañ digollet gant debarzhadurioù a-berzh Stad, met ne ouzer ket re vat c'hoazh penaos e vezont jedet hag arvarek eo an disoc'h. Gant-se, n'o deus ar strollegezhioù lec'hel ur galloud divizout nemet war ul lodenn digresket da vat eus o savadoù, o vezañ m'eo deuet ar Stad da vezañ o "c'hentañ paeer tailhoù" met ur paeer tailhoù a ziviz pep tra. Soñj ar C'huzul bonreizhel war ar Vonreizh n'eo deus ket gellet mirout ouzh an dagadenn-se enep ar frankizoù tiriadel.

Deuet eo dibosupl d'ar strollegezhioù lec'hel kaout ur sell war o budjedoù da zont. Ar "paeer tailhoù kentañ"-se n'eo deus savet reolen sklaer ha padus ebet hag a rofe tu d'ar strollegezhioù lec'hel da rakwelet o savadoù hag an doare da verañ kempouez o arc'hant, koulz war dachenn an dispignoù mont en-dro ha war hini ar postadurioù⁴. Bep bloaz, e gwirionez, e tle ar strollegezhioù lec'hel gortoz lezennoù nevez a-raok anavezout - diwezhat-tre - stad o arc'hant : lezennoù arc'hant a gemm reolennoù - luziet bepred ha diaes da gompren alies -debarzhadurioù ar Stad, lezennoù o krouiñ endalc'hioù nevez hep kempouezadur, redioù lakaet da dalvezout war digarez e vefe dle gant ar strollegezhioù lec'hel, pa servij dre ret o amprestoù d'ober postadurioù nemetken hep morse bezañ implijet evit ar mont-en-dro, er c'hontrol da re ar Stad.

Gant Gérard-François Dumont



Kelenner e skol-veur Pariz IV-Sorbon ; Prezidant ar gelaouenn *Population & Avenir*.

“

Hep

digreizenniñ

gwirion ne

c'heller ket

reiñ ul lusk

birvidikoc'h d'an

demokratelezh

lec'hel ha d'n

tiriadoù.

”

Kembelioù stag, kentoc'h, ouzh un "digreizenniñ kreizennet". Evel-just, kalz lezennoù o deus treuzkaset kembelioù a oa sammet a-raok gant ar Stad d'ar strollegezhioù lec'hel. Met, peurliesañ e vez ambrouget an treuzkasadurioù-se gant erverkoù ken strizh ken ne zoujer tamm ebet da frankiz merañ ar strollegezhioù lec'hel. Ouzhpenn, an dibaboù treuzkasadurioù graet gant ar Stad ne glontost morse gant pennaenn ar c'housezadelezh a gaver er Vonreizh peogwir e lâr ar mellad 72 "ez eo galvet [ar strollegezhioù lec'hel] da gemer divizoù a vo kemeret gwelloc'h d'o live evit an holl kembelioù". O treuzkas, e klask kentoc'h ar Stad en em zizober eus kargoù - reoù zo koulzskoude eus rummad re ar roue a-wechoù - ne zeu ket a-benn da sammañ mat, ne drezkas ket bepred ar peadra zo ganti pe, a-wechoù, un darn nemetken. War memes tro e lieskement an erverkoù strizh⁵, en o-zouez ar re zo, eus rummad ar pezh em eus anvet "kleñved lemm ar brastresoù"⁶.

Intrudu ar strollegezhioù lec'hel "skrapet evel ostaj". Ar remañ a ziskouez alies barregezh da neveziñ ha da sevel raktresoù. Met evit ur Stad he mil brec'h, n'eo ket posupl gouzañv e c'hellfe ar c'heodedour soñjal n'eo ket hi an hini nemeti o tivizout hag o neveziñ. Gant se, e o bet lieskement gant ar Stad stummoù ha niver ar c'hevratou skoulmet etrezi hag ar strollegezhioù lec'hel ken n'eus den ebet gellet o renabliñ betek-henn, hervez Lez ar c'hontoù. Met, dreist-holl, ne dalv ket ar c'hevratou-se e vefe engouestlet ar Stad hag en em sell evel dieub da chom hep doujañ dezho, hag ivez war dachenn an divizoù e-keñver arc'hant pa vezont lakaet sklaer. Sevel reolennoù luzietoc'h luzietañ zo ivez ur stumm eus ar "skrapadenn"-se, evel-se e vez bureviadekaet an doareoù ober lec'hel ha lakaet diaesoc'h an neveziñ tiriadel.

Pep tra evit Pariz, bruzun evit an tiriadoù all. E-pad ma ya war-raok chanter divent ar "Grand Paris Express"⁷, gant e 40 miliard a bostadurioù hag e vilardoù a goll da zont war ar mont en-dro, e-pad ma tegas ar C'hoarioù Olimpek da nebutañ 10 miliard d'ar rannvro bennañ, e resev an tiriadoù all bruzun pa welont o danframmoù retañ mont da fall evel ma ra, da skouer, ar rouedad hentoù-houarn, zoken an hentoù evit mont eus Pariz da gerioù bras evel Clermont-Ferrand pe Limoges.

En amdro-se, "frankiz merañ ar strollegezhioù lec'hel, eus o c'hembelioù hag o savadoù"⁸ a chom gerioù pa 'eo an dra ur c'hard kantved adkreizenniñ didrouz. Dleout ra anzavadur an dra-se bezañ diazez pep raktres distreiñ d'an digreizenniñ evit reiñ lusk d'an demokratelezh lec'hel⁹ ha d'an tiriadoù. ☺

(traduccion : Hervé Latimier)

1. Klokadur d'ar mellad kentañ degaset gant lezenn vonreizhel an 28 a viz Meurzh 2003.

2. Da lâret eo, evit ar pep kentañ, «ar c'humunioù, an departamantoù hag ar rannvroioù» hervez mellad 72 ar Vonreizh.

3. Lamidigezh war gresk abaoe ar 1añ a viz Genver 2023, ar skodenn war werzh ouzhpennet an embregerezhioù (GSOE).

4. Dumont, Gérard-François, « Géopolitique des territoires français : décentralisation versus recentralisation », *Diploweb.com, la revue géopolitique*, 15 a viz Gwengolo 2018.

5. Evel an artisielaat ebet rik (AER) ; sellet ouzh : Barrier, Jérôme, Dumont, Gérard-François, «Les territoires français face à la sobriété foncière. Une révolution salutaire dans l'aménagement du territoire ?», *Les analyses de Population & Avenir*, niv 44, Ebrel 2023 <https://doi.org/10.3917/lap.044.0001>

6. «Favoriser une meilleure gouvernance des territoires», dans : Allain, Joël, Goldman, Philippe, Saulnier, Jean-Pierre, *De la prospective à l'action*, Apors Éd., Bourges, 2016.

7. Dumont, Gérard-François, Paponnaud, Francine, «Repenser l'aménagement du territoire après la pandémie Covid-19. L'exemple du Grand Paris Express (GPE) et de ses projets d'urbanisme», *Les analyses de Population & Avenir*, niv 33, Mezheven 2021. <https://doi.org/10.3917/lap.033.0001>

8. Mellad 34 ar Vonreizh.

9. Gwelout : «Territoires : la démocratie (locale) en danger ?», *Population & Avenir*, niv 760, Du-Kerzu 2022 ; Ville, Frédéric, *La géographie bouleversée des territoires français. Progrès ou recul de la démocratie ?* 2023, Éditions Salentines et *Population & Avenir*, <https://www.cairn.info/la-geographie-bouleversée-des-territoires-français-9782956158028.htm>